

Ar chapeled a c'hloar

Da echuiñ reizh ar Rozera
Kanomp d'an Itron Varia
Ar chapeled a c'hloar vremañ

D : Meulom' Doue, Meulom' Jezuz, Meulom' Mari, Dre 'r Rozera

Soñjomp da gentañ er c'hloar vras
A Jezuz pa resusitas
Tri devezh goude ma varvas

D'an eil, pa bignas en neñvoù
Jezuz, Mab Doue, hon Aotrou
Leun a c'hloar hag a drionfoù

D'an trede, war an ebestel
Ha war hor Mamm selestiel
Pa zeuas ar Spered Santel

D'ar pevare, pa voe douget
Er baradoz gant an eled
Gwir Vamm hor Zalver benniget

*Pour finir la règle du rosaire,
Chantons à Notre-Dame
Maintenant le chapelet de gloire.*

R : *Louons Dieu, Louons Jésus, Louons Marie, Par le rosaire !*

*Pensons d'abord à la grande gloire
De Jésus, quand Il ressuscita,
Trois jours après sa mort.*

*À la deuxième, quand monta aux cieux
Jésus, Fils de Dieu, notre Seigneur
Plein de gloire et de triomphe.*

*À la troisième, quand, sur les apôtres
Et sur notre Mère céleste,
Descendit le Saint Esprit.*

*À la quatrième, quand fut portée
Au paradis, par les anges,
La vraie Mère de notre Sauveur béni.*

~~~~~